

Gwers Plistin.

Gwerherz gloriis Vari rouanez an ellez
Roît din me o suppli sklerijen deus an ne.

evid ma allin diskleria dirag ar gristenien
Eur malheur impouvantabl ag euzus da gompreñ.

ar seïtek a vis du ebars er bourg plestin
E savas eun den iaouank dal lun deus ar vintin
Mont a rez gant plijadur da zansal da ebatal
Dei's gousper sant Vodez.

Tremen a ra e zevez deus ar pen diveza
E kemeras liberte e zroug el varnezan
Enon en eun endred e kreis ar valijen.

Pa errue er ger da klasq e goan
E kave ar fumelen e hadressi an tan

Daou pleget deus e c'houeza da toma e souben
Mari Ivod e c'hanon da rei da intent.

Tapet a rei ar maleürus ebars eur fals kontel
Rei tri doll var e gouzoug den barbar a kruel.

Pan deus e skoet e beuzet en he goad
Evid diskuel evid petra e re ar miserrabl

En deus digoret ar pres destumet an arc'hant,
Sortiet ahane ractal en eun instant.

Mes ne el ket mond a bel
Goude e grim detestabl en deus renket mervel.

Komzo Jesus da sant Per a lavar
An hini a punis a vezò punisset.

Eur bolonjer o Distrei a marc'had gwerleskin
A entreas varnezi habitantet Plestin.

— Krena ra e oll vemprou ag hi erruet er ger
E vellet sort maleur pini voa erruet.

Sebillet voa ar c'hreg man a laked en he goele
Ag a neus bed ar bonheur a trugare Doue
Da koves da gomunia da reçeo a sakramanchou.

Ar belek goude e nouen a houlenas outi
Mar vouie en gouirionez piou en doua e massacret
A ma vije euliet
Gred e process-verbal a goude punisset.

— Neuse a diskleria (d')e amezeïen
Evid na vije murmuret var den.

An domestik a veven an deoa va oll fichans
A ra din koll va buhez evid va rekompans.

Enterret ar c'hreg man gand enor a respet,
Ebars ar veret plestin, en douser biniget.
Goulenomp ni a garo (1) parados d'he ine,
Evid ma vezø recevet e joaustet an nen.
Bed e zeo ar maleürus e hober pinijen
A zalek fin mis du petek mis goueren.

En eil devez ar Miz eo bed gillotinet
En ker deus a Lanhon, pan devoa meritet.

Pa deue deus ar prison o choud (2) dar maro
E klever kleïer a(r) Vali e c'hober e Kaonio.

Bale re betek chaffot ken buhen a peb den
O Doue trista maro o goassa planeden

Pas a pas voa bed heuillet gant ar beleg santei,
Konvertisset voa bed gantan kent ma deuas da vervel
Reçeo ra an absolven deus e holl pehejou,
Kent pigna var ar chaffot evid souffr ar maro.

— Me a zo milizour d'an hini a garo
Kemeret exempl diouzin da vonet d'ar maro

Da euilla an offiç divin evel ar gristenien,
Ma vijen victorius var ar goall blaneden.

Pedi ran an otrou Nerod, person deus a Plistin
(Enez e va konditor va euille petek maro),
Da ober instruction dan oll koz a iaouank
Partikulieramant d'ar re a voa presant.

Goulen a re person devot pardon digant Doue ;
An oll assistantet avertisse goude
Da renonç d'an nozvejou, d'ar jeuiou miliget,
Pere zo kos a vil maleur dre pever korn ar bed.

Mari Koad deus a S. Thégonnec, Klaskerez en Taulé.
13 juillet 1851.

(1) Ms , a garo ; lire : a galon.

(2) Ms : ochoud (ou c'hond) ; lire : o vonet (ou vont).